

Gabriel Milin: Ar pevar zroad bioc'h (1924)
(Erschienen in: G. Milin, Gwechall-goz e oa. Marvailhou dastumet, Kemper 1924.)

Eur wech 'oa eun den paour, gwreg d'ezan ha bugale leiz an ti : ar re-man n'o doa ket boued da zibri leiz o c'hof bemdez, hag o zad en doa poan o welet penaos edo e dorrad en dienez. Eun deiz e oa eat d'ar c'hoad da zastum keuneud sec'h : eur bec'h en doa dastumet tost, P'en em gav gantan eur bourc'his. An den paour a c'houeze kement e labourer.

- Petra 'rit aze ? eme ar bourchiz d'ezan.

- O tastum eun tamm keuneud sec'h emañ, emezan, evit aoza hor c'hoz tammou boued ha toma va bugaligoù.

- Paour oc'h evit doare ?

- Ya, paour omp sur hep gaou, ha poan hon eus o veva diwar an aluzen :

Paourentez n'eo ket pec'hed,
Gwell evelato tec'het.

- Mar kirit, eme an aotrou, e viot pinvidik.

- Ne c'houlennan ket beza pinvidik : gant m'am be peadra da veva va zorrad en o eas a zo walc'h... Petra 've red da ober evit se, aotrou ?

- Nebeud a dra, mar hoc'h eus eur vioc'h.

- Eo da, aotrou, eur c'hoz tamm bioc'h am eus.

- Mat eo neuze. N'hoc'h eus ken tra da ober, mar fell d'eoc'h beza en hoc'h eas, nemet laza ho pioc'h ha teurel he fevar zroad er-maez, dre ho siminal, an eil goude egile, en eur c'houlenn ar pezh ho pezo c'hoant da gaout bewech.

- N'eus ken, aotrou, nemet an dra-ze da ober, evit kaout ar pezh am eus c'hoant ?

- Netra ken ! eme an aotrou.

- Great e vezo hag ho trugarekaat ! eme an den-man, o lezel eno e vec'h keuneud hag o vont d'ar red d'ar gear.

P'en em gavas, e c'houeze hag ez oa berr warnezan. E wreg a oa o rei da zena d'he mab, pa ,z eas en ti.

- Petra ,zo a nevez ma ,z eus kement a herr warnout? Emezi.

- Mont a ran, eme heman, da laza va bioc'h. E pelec'h emañ ar vouc'hal ?

- Petra ! kollet ec'h eus da benn ?... ha petra ,raimp-ni goude ?

Heman a lavaras e daou c'her petra en doa klevet.

- Ha ma deo gevier a zo lavaret d'it ?... Gwelloc'h az pije great digas keuneud d'ar gear evit selaou komzou diskiant ar seurt...
- N'eus forzh ! eme an ozac'h; gwelet a rankan hag ez eo gwir.

Hag hen ha krapa er vouc'hal, mont d'ar c'hraou, laza e vioc'h, ha trouc'ha dioc'htu he fevar zroad diouti. Dont a ra ganto d'an ti.

- Brema, emezan, goulenn ar pez ac'h eus c'hoant.
- Gwella am be da c'houlenn eo e teufe skiant d'it... Brema ec'h eus great eun taol kaer !
- Lavaret a ran d'it goulenn ar pez ac'h eus c'hoant hag hast affo !
- Pa'z eo great, gwelomp ! emezi... Ra vezo ama, leiz eur zac'had, aour hag arc'hant, war an daol !...

N'oa ket a vec'h lavaret ganti hag eat an troad er-maez, ma ,z oa eno leiz eur zac'had a aour hag arc'hant.

- Ac'hanta ! Diskiant oun-me, Jaketa ?
- N'out ket da, emezi : n'eus ket lavaret gaou dit.
- Gwelomp brema an eil troad !... Ra vezo ama e-lec'h hon ti taouarc'h-ni eur maner eus ar re gaera, ha loened ha traou ennan, ha, war e dro, kement hag a zo e nep maner all ebet !...

Dioc'htu ma voe eat an troad kuit, setu eno neuze eur maner evel a oa bet goulennet.

- Brema, eme ar wreg, eo va zro-me da c'houlenn... Ra veza va bugale, kement 'zo anezo, savet bras ha tud fur eus ar re fura!

Hag an trede troad en ear.

Ma voe gwelet ar vugale, paotred ha merc'hed, - bete zoken an hini a roe ar vamm da zena d'ezan, - savet tud eno dioc'htu, tud vrao ha fur.

- N'eus mui nemet un troad ken. Petra 'c'houlennimp brema ? a lavar an ozac'h.
- Da dro eo, eme ar wreg. Goulenn ar baradoz evidomp holl.
- Ar baradoz a zo da neb a c'hounez anezan. Perak 'ta neuze goulenn mont di ?... Gwell eo kaout un dra bennak all.
- Netra ebet ken, eme ar wreg; a-walc'h a draou hon eus brema. Taol and troad-ze, emezi, me 'c'houlennno.

Sada ma voe taolet, hag ar wreg a c'houlennas mont, hi hag e zud, d'ar baradoz pa

varvchent.

N'ouzon ket avad ha bet int eat di : kredi a-walc'h a rafen, mar dint bet chomet fur gant o madou. Eun dra eo hag a zo diês a-walc'h a glecan, rak Jezuz-Krist e-unan, pa 'z edo war an douar, en deus bet lavaret ez aje kentoc'h eun dremedal dre graouenn eun nadoz eget eur pinvidik d'ar baradoz. Abn hent-se, a zo eun tamm brao strisoc'h eget na doa siminal an ti-soul, ne da ket treid saoud drezan.

Eur pennad goude an dra-man, an den-man en em gavas gant eur breur en doa, ker paour ha ma 'z oa hen ivez araok. Gwreg ha bugale en doa ivez. Mantret 'voe pa welas penaos 'oa gwisket e vreur, ha bec'h en doe oc'h e anaout.

- Petra ! emezan, te eo a zo er c'hiz-ze ?... Asa, lavar d'in penaos out deut ker pinvidik, e ker berr amzer !

- Penaos ? eme egile, n'eo ket diês, ha mar kerez, e teui ker pinvidik ha me.

- Mar karan ? Ne c'houlennan ken tra digant Doue.

- Mat ! selaou. Breman ez eus c'houec'h sizun ez is da zstum keuneud d'ar c'hoad 'zo aze, p'en em gavas eun aotrou ganen hag a c'houlennas aouzin ha c'hoant beza pinvidik am boa. - «Ya da ! emeve, ma ve gallet. - N'eus netra easoc'h, emezan. Laz da vioc'h ha taol e fevar zroad er-meaz dre ar siminal, an eil goude egile, en eur c'houlenn ar pezh ac'h eus c'hoant.» Ober a ris ar pezh a lavaras d'in, ha setu penaos oun deut ker pinvidik ha ma 'z oun... Gra evel-doun, mar gellez.

- Kea atao. Ober a rin, ma kavan an dro, evit klask gwelet penaos e troio ar stal war gement-se.

Neuze dioc'htu ar breur egile a ya d'ar c'hoad, ober a ra an neuz da glask keuneud, ha dastumet en doa diou pe deir brochenn bennak, - evelato n'eo ket gant an dra-ze ez oa touellet, e lagad a glaske ha furche ar c'hoad tro-war-dro, - pa welas an aotrou, a glaske pell a oa, o tont etrezeg ennan.

- Ema-hen o tont, gwell a ze !

Hag hor gwaz neuze, herr warnan, a glask tizout tamm keuneud ama, tamm all a-hont.

- O klask keuneud emaeur 'ta ? eme an aotrou.

- Ya da, aotrou. Red mat eo, pa n'oun ket evit prena, re baour oun evit se, anez va bugale a varvfe gant ar riou ha gant an naon : keuneud fall pe vat a zo red da aoza ar boued.

- Pa 'z oc'h ker paour-ze, mar kirit, ne viot ket pell.

- Karet a-walc'h, aotrou ! Ha penaos ?

- Eas eo, mar hoc'h eus eur vioc'h da laza. Pa vezo lazet, trouc'het he fevar zroad diouti,

ha taolet-i goude er-meaz dre ar siminal, an eil goude egile, en eur c'houlenn pep tro ar pezh hoc'h eus c'hoant, hag ho pezo ar pezh a gerot.

- N'eus ken da ober ?
- Netra ebet ken ! eme an aotrou.
- Va bennoz d'eoc'h ! eme heman neuze, o vont kuit ez dillo.

Mar doa eat ar c'henta buan d'ar gear, heman a yeas buannoc'h c'hoaz, rak gouzout ervad a rea dioc'h e vreur ez oa gwir en doa lavaret an aotrou d'ezan.

E wreg, p'en em gavas, a oa ivez o rei da zena d'he merc'h. Heman, hep lavaret ger d'ezi a gemer e vouc'hal, eun difre warnan. Ma lavaras e wreg:

- Mont a ran, emezan, p'oa e lost an ti, da laza va bioc'h.

Houman, pa glev, a grap en he merc'h hag ez a war-lerc'h he gwaz

- Petra am eus klevet ? emezi. Da laza da vioc'h?... Ne ri ket pe me 'welo!
- Ne weli ket da ! emezan, rak great an taol.

Gwir 'oa. Kaer he doa bet mont buan, heman, en eun taol, en doa pilet ar vioc'h keaz : n'oa ket bet diêz d'ezan, rak ken treut 'oa ma 'z oa e doare eur garnel pe eur zac'had eskern.

- Sad' ama eur c'hoari hirio gant an den diboell-man ? emezi. Ha me ha da vugale, petra 'raimp-ni brema, pa n'hor bezo mui berad leaz ?...
- Ro peoc'h din ! Gwelet a ri petra 'raimp !... Pep troad a vezo strinket er-meaz dre ar siminal, ne vezo nemet goulenn ar pezh a vezo c'hoant da gaout hag e vezo digaset dioc'htu.
- Te ac'h eus kredet traou ar suert-se, dorgen ma 'z out ?... Na piou, laar d'in, a zo bet o fourra ar seurt traou fall-ze ez penn ?
- Pe forz zo ! eme an ozac'h, o tiframe, endra c'hell, ar c'hroc'hen dioc'h e vioc'h.

Pa voe diskroc'hennet penn-da-benn gantan, e trouc'has he fevar zroad diouti, e kasas anezo d'an ti hag e lavaras d' e wreg:

- Brema me ya en eur redadenn da Landerne (n'oa ket pell ac'hano o chom); bremaik e vezin distro; foar 'zo hirio ha me a oar e vezo reked war ar c'hrec'hin. Gortoz 'ta eur pennad ken na vezin distro. Neuze e welimp petra da ober.

Hag hen ober gaol kuit, o rampa da Landerne. Dioc'htu ma voe eat kuit, e wreg, droug enni o welet ar pevar zroad bioc'h war an daol eno, a c'hrosmol etre he dent:

- Setu ni lekeat reuzeudik, brema n'hon eus bioc'h mui. Hag an dra-se evit petra ?... Evit kaout pevar zroad na roint foeltr seurt vad ebet d'eomp !... Na petra rofent-i ?... Red eo ma

ve kollet e benn gant Fanch hirio !... Biskoaz n'em eus gwelet anezan er c'hiz-se. Ma n'eo ket diskiantet evelato, en deus bet eun abeg vat bennak da ober an dra-man. Gwella zo eo gwelet hag ez eo gwir a lavar.

Hag ar wreg ha kregi neuze en eun troad gant an dourn, a-pad ma talc'he he merc'h en he brec'h all.

- Evit unan a vezo kollet, mar deo gwir, e vezo tri all da c'houlenn ar pezh a vezo c'hoant goude.

Neuze ar wreg-man a lavar, en ur stlepel an troad er-meaz dre ar siminal:

- Ra vezo d'am merc'h eur varo henvel oc'h baro he zad !

Ha dioc'htu setu eur pezh baro savet oc'h ar verc'hig paour, ma 'z oa da elet ken euzus ha ker blevek hag eun ourz. Ar wreg a zo mantret ha glac'haret brema, divezat eo d'ezi kaout keuz : kemeret a ra he zizailh da drouc'ha bleo ha bao, ha dre ma trouc'he, e savont gwasoc'h-gwaz, hirroc'h-hirra. Ker stoufouilhek oant ne weled mui daoulagad ar verc'h paour; eat oa evel eul loenig gouez.

- Deport, deport ! emezi; p'en deus eun troad digset baro d'am merc'h, eun all o c'haso kuit.

Hag eun troad all er vann er siminal, ha setu eat ar baro diwar ar baotrezig vihan, deut evel ma 'z oa kent.

Neuze ar vamm a roas d'ezi da zena, hag, a-vec'h ma 'z oa-hi lekeat en he c'havell da gousket, m'en em gavas Fanch er gear. Kenta tra a eure 'voe klask treid e vioc'h : e-lec'h pevar n'oa mui nemet daou.

- E-pelec'h ema an daou all ? emezan d'e wreg.

- E fedoue ! emezi, emaint eat du-ze dre ar siminal.

Neuze houman a lavaras penn-da-benn kement he doa great ha lavaret.

Fanch, krog en trede ha savet e vrec'h gantan, a strink anezan dre ar siminal, en eur lavaret :

- Ra ve eun troad bioc'h a-dreuz da c'henou, foranez !... Hag ezomm az poa da c'hoari gant an treid-ze ?... Lavaret em oa d'it va gortoz; n'ec'h eus ket great, gwaz a ze evidout !

Pell-bras a-raok ma 'z oa echu e gomz gantan, e oa stanket kloz genou ar wreg : n' oa evit prezeg na krial.

Sacha ha ra gant he daou zorn war an troad hag e chaokat gwaz evit ur c'hi war eun askourn.

- Sad' a zo kavet labour d'az teod brema ! eme Fanch. Mar karjes beza tavet da c'henou ha gortozet ken na vijen-me bet distro, ne vije ket en em gavet an dro-man ganez. Evel-se e

tlefe beza great da gement tead fall a wreg a zo !...

Evelato houman a lekea kement a foan da glask distaga an troad, ma kouezas war al leur-zi, eur c'houezenn warnezi ma 'z oa spontus. neuze e savas truez gant Fanch oc'h e wreg, ha goude beza he zavet en he zav, e lavaras :

- Evelato, mar chomfes evel-se, Janed, e ve mez d'in mont ganez e nep lec'h, hag ouspenn poan a-walc'h ac'h eus bet !

Neuze Fanch a daol ar pevare troad er-meaz, en eur lavaret:

- Ra 'z aoi an troad bioc'h eus a c'henou va gwreg !

Sada ma 'z eas kuit ha ma oa kollet gant an dou-man ar mad o divje gallet kaout, ma vijent bet fur an eil hag egile.

Setu penaos a c'hoarvez gant e-leiz a dud paour 'zo, ne dleont tamall da zen nemet d'ezo o-unan, rak, ma karfent beza fur ha lakaat da dalvout ar galloud o deus bet digant Doue da zastum madou er bed-man hag er bed all, e vent eurusoc'h eget na dint. Tud a zo ha n'o deus ket skiant al loened zoken.